

Dizano : Telenn Gwengamp

15 a viz Kerzu 1869

Lizer d'an Aotrou Skourr

Evid beza kinniget din eul levrig greet gantañ

### **Telenn Gwengamp**

E-kreiz ar goan petra neve' ?  
Kanañ 'ra drant e beg ar gwe(  
'Vel e miz Mae al laboused :  
Telenn Gwengamp en-deus klevet.

Nijal 'reont a-denn-askell,  
Euz pep koad 'zo e Breiz-Izel ;  
O tiskuizañ n'o gweler ket,  
Telenn Gwengamp en-desu klevet.

Peleh et-hu evnedigo'  
En amzer yen pell euz ho pro ?  
Ar vro enni oh bet maget ?  
« Telenn Gwengamp on-eus kelvet.

« Mond a reom da Vontroulez  
Da zeski meuli ar Werhez ;  
Eno emañ ar Barz gouezieg  
A gan ken flour en brezoneg. »

Evel an heol, d'ar mintin,  
Gwelet en-deus o vousec'hoarzin  
Gwerhez Wir-Zikour venniget,  
Telenn Gwengamp pa 'deus klevet.

Daolinet on bet da houlen  
Bennoz Doue war ho Telenn.  
Kanom 'ta Jezuz hag e Vamm  
Evel ma lar Telenn Gwengamp.